

KAERRAÑ ROZENN

Bez' ez eus rozenn gaer
'Kichenn va zi hihan
Bez' ez eus eur rozenn gaer
La la la la la la
Kichenn va zi bihan !

Eur rozenn a lugern sklêr
'Kichenn va zi bihan !

Honnez 'zo eur rozenn wenn
Dous 'vid ar weladenn !

Bez' ez eus eur rozenn voug
Hag a lak sklêrijenn !

E ped kalon hlan he doug
Gouestlet da virviken !

Hi eo rozenn ar yhed,
Rikour ar glañvourien !

Hi eo rozenn ar spered,
Sikour ar hedourien !

Hi eo rozenn gwellañ peoh
Beteg 'kreiz an emgann !

Hag ivez rozenn ar paour

Beteg 'n e dremen van !

Gras ma hello bevañ pell
Rozenn ar garantez !

Ha dougen a-denn-askell
Magadurez-ene !
Neuze e peb korn a Vreiz
Richano an evned !

'Tiskleriañ kalon ar vamm
Evel brasañ kened !

Setu aze istor verr
Rozenn va zi bihan !

Oa bet kontet din gwechall
Gand eur wennilienn.

Greet ganti he demeurañs
Just e korn ar prenest.

Hag ar rimodennou-mañ.
Trugarez d'he mestrez.

Alice LAVANANT

